

iMBROURCH



un hent
a gavan



pe a zigoran

30 Ebrel 1971

kelaouenn

bolitikel

niv. 16

IMBOURC'H, K E L A O U E N N B O L I T I K E L

Niverenn 16

30 Ebrel 1971

T A O L E N N

Tonkad Imbourc'h.....	p.85
Breutadeg diwar-benn "SKOL AN EMSAV" (kendalc'h).....	p.88
Addisplegoù.....	p.92
Kevredoniezh un dispac'h pe : pempvet bloavezh an dispac'h aljeriat, 1959, hervez levr Frantz Fanon, gant Yeun Gourvez.....	p.103
Addisplegoù e ser ar pennad "Stourm ar framm gall a-enep d'ar stuzegezh hengounel en Aljeria".....	p.108

A

Ar pennadoù embannet gant izili EMSAV AR BOBL VREZHON ebarzh

IMBOURC'H ne enouestlont e nep doare an aozadur e unan.

Koumanant-bloaz : ugent lur. K.R. Y. Ollivier, 1 534 25 Roazhon.
Deraouiñ a ra ar c'houmanant-bloaz e miz Genver. Priz an niverenn :
2,00 lur. Ar pennadoù hag al lizhiri a zo da gas da EMSAV AR BOBL
VREZHON (IMBOURC'H), 30 leurgêr al Lisou, Roazhon.

.° CPPP 50 015

T O N K A D I M B O U R C ' H

Lennet e vo pelloc'h ur pennad skrivet gant unan eus hol lennerion e ser ur skrid embannet ebarzh IMBOURC'H e ser ar gelaouenn hec'h unan, hag an addisplegoù am eus graet d'ar pennad-se.

Karout a rafen diskleriañ er pajennoù-mañ da heul - hag en un doare hollekoc'h - va soñj diwar-benn roll ha kefridi IMBOURC'H. Notomp, dagentañ, ez eo enskrivet ar meneg "kelaouenn bolitikel" e-kichen an talbenn. Se zo lavarout e tlefe ar pep brasañ eus ar pennadoù bezañ gouestlet d'ar politikerezh. Hogen o follennata pajennoù ar gelaouenn er bloavezh tremenete verzo unan ez eus kalz diouto^o plediñ gant kudennoù armerzhel ha bet skrivet, eveljust, en ur yezh kalvezel dreist da intent an darn-vuiañ eus hol lennerion, o vezañ ma ne oar ar re-mañ nemet ar yezh eeun. Dav e vefe eta kaout pennadoù liesseurtoc'h, a tennañ d'ar politikerezh na petra, hag a c'hellfe bezañ skrivet en ur yezh aes a-walc'h. Kement-se n'eo ket gallus betek henn dre maz eo re zistank niver ar skrivagnerion gouest da sevel pennadoù evit ar gelaouenn. Moarvat n'on ket bet barnet c'hoazh evel penn-skrivagner EMSAV alies da leuniañ va unan niverennoù eus ar gelaouenn penn-da-benn. Hogen anat eo ez eo c'hoarvezet an dra-se meur a wech hag e c'hell c'hoarvezout c'hoazh keit ha ne vo ket niverusoc'h an danvez skrivagnerion barrek da sevel pennadoù evit ar gelaouenn. Moarvat ne sav ket ar re-se pennadoù peogwir ne ouzont ket ar yezh a-walc'h (marteze ivez peogwir int re yaouank evit kaout c'hoazh ur preder personel); hag e gwirionez, ma lakaer^{a-ziforc'h} tri pe bevar, e rank an holl bennadoù a vez kaset d'ar gelaouenn bezañ reizhet gant ar pennskrivagner e-keñver yezh. Setu, evit ma teuy IMBOURC'H da vezañ kelaouenn an emsaverion yaouank e tleo an danvez skrivagnerion a zo en o zouez peurzeskiñ ar yezh ; ar pal-se a c'hellint tizhout o skrivañ pennadoù end-eeun pe dre heuliañ ur rummad kentelioù

dre lizher war al lennegezh pe, da vihanañ, ar skridaozañ (pezh a c'houlaka un anaoudegezh vat eus ar yezhadur hag an ereadurezh, pergen). Ret eo lavarout n'o deus ar re yaouank nevez d'uet d'an Emsav lennet netra e brezhoneg peurvuiñ hag o deus desket ar pep brasañ eus ar yezh lennek a anavezont o taremprediñ trevioù E.B.V. ha S.A.E. Darn all a anavez un tamm gwelloc'h ar yezh lennek-se hogen he desket o deus diwar lenn ur gelaouenn skrivet en ur yezh kalvezel a-walc'h peurvuiñ ; n'o deus lennet nemet nebeut tre eus kelaouennoù lennegel rik - ha savet en ur yezh voutin - AL LIAMM pe GWALARN ma vije ar gelaouenn-mañ da gavout c'hoazh ; rak-se ivez ez eo luziet ha diazas o yezh meur a wech.

Soñjet em boa ledanaat kelc'hiad ar skridaozerezh hag ar mererezh en IMBOURC'H adal ar bloaz-mañ. Se n'eo ket bet gallus o vezañ ma n'eus ket - egiz ma verken bremaik - a-walc'h a skrivagnerion yaouank gouest da gas pennadoù en un doare reoliek d'ar gelaouenn hag o vezañ ivez ma n'oa tu ebet da ziskoulmañ en un doare pleustrek kudennoù ar stensilañ, ar moulañ hag ar mererezh dre vras. Spi am eus avat e vo tu da ziskoulmañ ar c'hudennoù-se a-benn 1972 ha da gevredikaat ar gelaouenn da vat e deroù ar bloaz a zeu, - ar pezh a hetan e pep keñver, pa ne ve nemet dre maz eo renadur ha kempennadur ar gelaouenn ul labour pounner kenañ.

Evel m'em eus merket n'eo ket IMBOURC'H ur gelaouenn gefridiel e nep doare : ne gav ket din e c'hell bezañ ergorelezh ebet en un Emsav n'eus ennañ nemet un nebeut degadoù a dud evit ar poent, hag an darn-vuiñ dic'hourdon a-walc'h ouzh o micher emsaver. Padal e kav din e tlefe bezañ he roll dezrannañ obererezh E.B.V. e unan koulz ha labour al luskadoù pe strolloù breizhek liesseurt a zo oc'h oberiañ war dachenn Vreizh. Kement-se a zo ret ma fell d'ar stourmerion gwelout sklaer an hent o deus da heuliañ. Anat eo avat ned eo E.B.V. evit ar poent nemet un egin ; n'eus ennañ nemet tud yaouank ; e obererezh a zo bet strishaet e par ur metou arbennik meurbet, hini ar studierion.

Un dañjer a zo eta e c'hellfe bezañ korvoet gant strolladoù stankoc'h ha frammet startoc'h eget ned eo E.B.V. evit ar mare. Ret mat eo anzav - hag a oa da c'hortoz a-hend-all - n'eo ket bet gouest da virout an intrudu politikel er Skol-veur er bloaz-mañ, goude taol-arnod Euskariz e miz Du diwezhañ hag emañ war var, - ma ne ziwall ket - da vezañ implijet gant stroll pe stroll ha n'int ket eus an Emsav e nep doare, war wel da balioù ha n'o deus ket bepred un darempred anat gant re E.B.V. Se a dalvez ivez ez eo poent da E.B.V. dont er-maez eus ghetto ar Skol-veur evit klask tizhout ar boblañs war-eeun. Ne vern penaos, ar pezh a fell din merkañ eo ne c'hell argelaouenn bezañ maget nemet gant obererezh E.B.V. hag ez eo treut an danvez politikel er gelaouenn peogwir eo dister labour politikel gwirion E.B.V. Ne c'hell IMBOURC'H kreskiñ eta nemet war un dro gant E.B.V. e unan ; c'hoazh ez eo ret da hemañ mirout da gentañ e orinelezh hag e zishualded.

Y.OLIER

KAMP EVIT DESKIÑ IWERZHONEG (eil kemennadenn)

N'eus ket bet tu da aozañ ar c'hamp evit deskiñ iwerzhoneg d' "an daoulamm" da geñver Pask, evel ma oa bet hor mennad. E Breizh-Veur e oa harz-labour gant ar bostourion e C'hwevrer ha Meurzh, pezh en deus miret ouzhimp a genskrivañ gant Kembreiz, Kerneveuriz h.a. Hag an nebeudig Breizhiz o deus respontet a gave e oa Pask re abred, e vije gwelloc'h gortoz an hañv. Ne vije ket bet a-walc'h a berzhidi eta.

Respontoù a-walc'h hon eus bet evelkent evit krediñ e talvez ober an arnod adarre. Ur C'herneveurad, ur Breizhad, ur Japanadez ha dreist-holl Kembreiz o deus diskleriet e karfent dont. Divizet eo eta e vo dalc'het ar c'hamp, gant ma teuy da vihanañ daouzek den, etre an 8 hag an 21 a viz Eost e Trà Bolgan, tri c'hilometr eus Whitegate, er c'hreisteiz da vMiddleton-Cork. Ur skol iwerzhoneg a zo eno a vez digor a-hed ar bloaz, ha frankiz e-leizh evit lojañ enni ha bale tro-war-dro. Lec'hiet brav eo gant parkeier hag ur c'hoad diouzh tri zu hag ar mor gant un draezhennig war-hed kant metrad diouzh tu ar c'hreisteiz. Boued, lojeiz ha kelennadur a vo roet evit 140 lur ar sizhun. Degemeret e vo an holl re a fell dezho deskiñ elfennoù pouezusañ ar yezh hag he distagadur. O vezañ avat ma ne dalvez ket ar boan aozañ ar rummad kentelioù nemet e teufe da vihanañ 12 den e rankomp goulenn digant ar re a fell dezho dont henn reiñ da c'houzout diouzhtu ha kas 40 lur kretadur da Alan Heussaff, 9 bothar Cnoc Sion, Ath Cliath, 9, Iwerzhon, diouzhtu pe a-raok ar 7 a viz Gouhere. Mard eo dic'hallus kas ul lizher arc'hant e c'hellimp erbediñ un hent all. Kaset e vo an arc'hant endro kenkas na ouestlfe ket un niver bras a-walc'h a dud dont. (kendalc'h p. 109)

BREUTADEG DIWAR-BENN "SKOL AN EMSAV" (Kendalc'h)

Yaou 7 a viz Ebrel 1971

Poulzet on da gas ul lizher da IMBOURC'H. N'eo ket dre m'em bo traoù a-bouez da lavarout met dre ma soñjan n'eo nemet gant ur c'henlabour gwirion a-berzh pep hini e c'hellimp reiñ ur pouez bennak da IMBOURC'H.

Hag evit ar poent e verzan un dra anat : al lodenn vrasañ eus an dud (ar re a lenn IMBOURC'H pe a zo ebarzh S.A.E. pe ebarzh E.B.V.) ne c'hellont ket kemer perzh rak m'eo re hir ha re start dezho lenn IMBOURC'H. Hag e gwirionez eo re ziaes ar yezh, ha diaes hep abeg alies tre. Eveljust, n'eus ket tu da skrivañ ur studiadenn, lakaomp, diwar-benn kondon Breizh en ur yezh voutin, met un darn vras eus ar pennadoù a vefe tu da skrivañ anezho en ur yezh aes. N'eo ket ret ober gant ul luc'haj a vrizh-ouiziegezh ; sofistikerezh n'eo ken.

Ma pouezan war ar c'hraf-se eo dre ma vir ouzh kalzig a dud da gemer perzh ha dre ma viro ouzh IMBOURC'H a vezañ skignet muioc'h-mui. Setu va soñj, da vihanañ, a-zivout unan eus ar skoilhoù a harz ouzh IMBOURC'H a vont war-raok. Er c'heñver-se avat e kavan kalz gwelloc'h niverenn diwezhañ IMBOURC'H. Moarvat, pennad Kerrann a oa start a-walc'h hogen pennadoù F.F. ne oant ket re ziaes ; a-wechoù, gerioù dic'hortoz amañ hag a-hont, "delanvad"(1), da skouer. Met war aesaat ez a IMBOURC'H eta.

En ur c'heñver all ivez ez a IMBOURC'H war wellaat : e-keñver an danvez. Liesseurt a-walc'h e oa ar pennadoù, ha bez e oa memestra ur pennad ivez a-zivout ur gudenn bolitikel, pezh a zo mat en ur gelaouenn bolitikel.

Diwar-benn pennad F.F. "Ar gleizelourion ha ni" e vefe traoigoù marteze da lavarout. Da gentañ ez eo pleustrek tre saviad F.F. Daoust maz eo diaes tre sevel un daolenn sklaer (hag henn santout a reer ebarzh pennad F.F.) ez eo an doare-se an hini gwellañ da gemer. A-hend-all en em goller en daelerezhioù ranezennek ha didermen evel m'o deus graet ar gleizelourion warlene. Met daoust d'e emzalc'h

(1) "Levezon".

pleustrek e ra F.F. eus ar gleizelourion "tud a zo ganto albac'henn ar Skritur hag ar Profed..." Souezhet bras on rak kunujennus eo seurt doareadur ha maz eo gwir en ur stumm ned eo gwir nemet en ur stumm ; hag o vezañ ma n'eo ket bet resisaet bevennoù an diogeladur-se e oa koulz - ha gwelloc'h zoken - chom hep henn menegiñ. (1).

A-hend-all, a-zivout ar pennad-mañ c'hoazh e c'heller merzout ez eo un tammig kozh ; da lavarout eo, ober a ra dave d'ur mare a ya en tu all da Nedeleg 70 emichañs ; rak abaoe eo deuet ar gleizelourion da vezañ pleustrekoc'h, rak o diskar dres ; adaptet o deus nerzh ha kement tra a zo bet lavaret gant F.F. n'eo ket gwir tre er mare-mañ.

A-raok echuiñ eo ret din kemer perzh er vreuradeg a-zivout S.A.E. o vezañ maz on ezel eus S.A.E. Dre vras ez on a-du gant pezh en deus displeget F.F. en e lizher.

Dipitus tre eo, a gav din, ne vije ket bet sinet ar pennad diwar-benn S.A.E. Ur pleg fall da gemer eo se, skrivañ traoù an anv ur Strollad hep gouzout hag-eñ e vo izili ar Strollad a-du gant ar mennozioù eztaolet er pennad-se hag evit pezh a sell ouzh ar skrid-mañ diwar-benn S.A.E. ez eo an degouezh, war a seblant.

Klevet em eus lavarout e tenne pennad Y.O. d'ar faltazi. Un tammig kreñv eo ar ger moarvat. Komz eus kelennerion gopret, eus kelennerion anvet en o c'harg diwar arnodennoù tremenet ganto, eus an darempredoù etre an trevioù ha kreizennoù S.A.E., eus tonkad S.A.E. en tu-hont da savidigezh ur Stad Vrezhon ha da zieubidigezh Vreizh a zo dic'hortoz lies a wech. N'eo ket dre maz eo diboell an traoù-se ; met n'eo ket spisaet ar mare anezho ha, dre vras, ez eo an traoù-se re resis e-keñver ar pell maz

(1) Kavout a reer an diogeladur-mañ en un notenn e traon ar bajenn ha n'eo ket diwar bluenn F.F., diwar hini rener ar gelaouenn, ne lavaran ket, nemet ez eo bet gwallleget e sinañ o vezañ ma hañvale bezañ dibouez. Daoust ma c'hell bezañ talvoudus evit politikerezh E.B.V. kenoberiañ gwech a vez gant ar "gleizelourion" ne c'heller bezañ stag ouzh ar re-mañ en un doare santimantel. Arabat eo disoñjal en em lec'h evelato ar gleizelourion pe er framm gall pe en ur par etrevroadel ; dre vras ne zegemeront ket c'hoazh pennaennoù ar vroadelouriezh vrezhon a zo e diazez E.B.V. En deiz m'o degemerint n'o devo ken d'ober nemet emezelañ en E.B.V. end-eeun. Y.O.

eo an amzer ma c'hellint c'hoarvezout.

A-geveskemm n'eus ket bet komzet kalz eus ar pezh a zo bremañ, eus mennad hollek S.A.E. : ledanaat kevredigezh ar vrezhonegerion, diouer an deskadurezh vrezhonek war gement tachenn a zo. Dav e vefe displegañ kement-se gant arguzennoù a dizhfe an Emsaverion koulz hag an dud ha n'int ket eus an Emsav.

Ur rebech a rin-me a-hend-all ouzh ar skrid savet diwar-benn S.A.E. : n'eo ket sklaer an displegadennoù, a gav din. Ne gomzin nemet eus teir skouer. 1) SKOL AN EMSAV hag an trevioù; 2) brezhoneg ar bobl ha brezhoneg an Emsav; 3) ar brezhoneg, yezh vroadel Breizh.

Pa vez displeget kenereoù an trevioù ha kreizennoù S.A.E. ne ouzer morse eus peseurt mare e komzer : hiziv, warc'hoazh pe pell ac'hann ; ne ouzer ket resis kennebeut eus peseurt trev e komzer : bourc'h, kêr pe ur rann anezho pe ar bodadoù a zo gant E.B.V. hag a vez anvet "trev" ivez.

Pa vez graet anv eus brezhoneg ar Bobl ha brezhoneg an Emsav ez eus droukvesk ivez, d'am soñj-me, rak hervez an dud ez eo diforc'h ar ster a zo gant "Brezhoneg ar Bobl" ha "Brezhoneg an Emsav". Evit lod ez eo dalc'hidi "Brezhoneg ar Bobl" mirelourion, santimantelourion a fell dezho e chomfe ar brezhoneg ur yezh trefoet, isdiorreet. Evit darn ez eo "Brezhoneg ar Bobl" pe ar garantez **evitañ, da vihanañ**, arouez un emzalc'h divreizhek tra ma vefe "Brezhoneg an Emsav" arouez emlusk ur yezh oc'h arneveziñ en bev... Met lod all a soñj ez eo "Brezhoneg ar bobl" ar brezhoneg bev tra maz eo brezhoneg an Emsav yezh an "Intellektualed", yezh al "lenneion" (keñveriit yezh an Emsav ha yezh EMSAV). Doareoù all a zo c'hoazh da veizañ ar gerioù-se : implijout anezho a zo eta mont tre en un traped.

Gwelloc'h e vije bet, d'am soñj, displegañ pezh a glask ober S.A.E. An tabutoù diwar-benn ar brezhoneg damdrefoet pe unvan, arnevez pe a c'hiz kozh a vefe lec'hiet neuze en obererezh a vennomp kas da benn hep en em droc'hañ krenn diouzh lod eus an dud a zo, a-benn ar fin, a-du gant diorreadur hag adnerzhekadur ar brezhoneg.

A-zivout tem ar "brezhoneg yezh vroadel an holl Vrezhoned" e soñjan evel F.F. : stad ar yezh en amzer Nevenoc n'he deus pouez ebet. Penaos difenn ar mennoz-se eta ? Dre ziskouez pegen teusk eo arguzennoù tud zo a-enep d'ar mennoz-se, ha dre ziskouez ivez ez eo stourm ar brezhoneg a-lusk gant ar stourm broadel, eveljust. Met marteze ne dalv ket ar boan ober anv eus ar gudenn-se en ur skrid bruderezh ? Ar pep pouezusañ n'eo ket difenn an dezenn-se met kelenn brezhoneg da Vreizh-Uheliz.

Distreiñ a ran bremañ d'ur gudenn all a sell ivez ouzh S.A.E., hini ar c'hreizennerzh. Ma sellomp ouzh ar fedoù - "furoc'h eo derc'hel d'ar fedoù eget diazezañ an traoù diwar vartezeoù," eme F.F. - e verzfemp ez eo bet digreizennet a-viskoazh SKOL AN EMSAV, ez eo bet savet a-drugarez d'an digreizennerezh-se. Ha ma klaskfed kreizennañ ez asouped ouzh daou skoilh pennañ :

- evit kreskiñ he deus ezhomm S.A.E. eus intrudu pep hini ; hag ar c'hreizennerzh - se a ouzer mat - a voug an intrudu ;

- d'an eil, penaos kreizennañ S.A.E. ha pelec'h ? E kreizenn Roazhon ? Diaes a-walc'h eo dija kenurzhiañ Roazhon nemetken ? Penaos eta sammañ kreizennadur SKOL AN EMSAV en he fezh ?

Evit ar mare eta ne c'hell ket S.A.E. bezañ kreizennet. Ret eo avat diorren tamm ha tamm ar c'henaozadur hag ar c'hevreadur anezhi.

Setu ar pep brasañ am boa da lavarout a-zivout "Kefridi ha tonkad SKOL AN EMSAV". Hir a-walc'h eo bet va fennad skrid.

Spi am eus e vo skrivet lizhiri all evit reiñ danvez d'ul levrenn diwar-benn S.A.E. Mat e vefe ivez en em vodfe tud da genlabourat ha da gensevel an destenn a zo ret da S.A.E. kaout.

I.G.

BREUTADUR diwar-benn kleizelouriezh ha SKOL AN EMSAV
(kendalc'h)

Trugarekaat a reomp hor mignon I.G. evit al lizher dudiñ en eus skrivet hag a roy tro da stourmerion E.B.V. pe S.A.E., spi hon eus, da eskemm mennoziou diwar-benn politikerezh an Emsav end-eeun pe ar stourm evit ar yezh e framm un aozadur evel SKOL AN EMSAV.

O lenn lizher I.G. em eus desket meur a dra diwar-benn an doare ma c'hell ur c'helenner eus S.A.E. buhezañ e labour, penaos ivez e c'hell un ezel eus E.B.V. meizañ obererezh ar c'henurzhiadur ma aparchant dezhañ ; merzout a ran, pergen, ez eo nec'het ar stourmerion yaouank gant kudennoù a denn da gentañ d'ar metou - ledemsav ha Skol-Veur - ma rankont strivañ ennañ. Klask a rin eta reiñ ur savboent all, d'am zro, a-zivout ar c'hudennoù a zo bet meret er skrid talvoudus-mañ hag a c'hell pourchas danvez un emziviz etre izili E.B.V.

War dri foent eta e fell din displegañ va mennoz :

I. Imbourc'h.

II. Kudenn ar gleizelouriezh.

III. Skol an Emsav hag ar stourm evit ar yezh.

IMBOURC'H.

Merzet em eus va unan e oa diaes yezh Imbourc'h. meur a wech, dreist-holl avat er pennadoù "kalvezel" a vez embannet enni dre ziouer a zanvez all (diaes eo komz eus armerzh pe zouaroniezh, lakaomp, e brezhoneg eeun). Ha kompren a ran o defe al lennerion yaouank dreist-holl poan da intent ar skridoù-se, kelennerion S.A.E. zoken rak ar re-mañ ivez ne reont nemet boulc'hañ studi ar yezh : ne ouzont d'ar muiañ holl nemet 2.000 pe 3.000 ger d'ar muiañ (pa ouzont etre 20.000 ha 30.000 e galleg, da lavarout dek gwech muioc'h).

Da c'hortoz m'o devo skolidi ha kelennerion S.A.E. desket ervat o yezh - ha se a c'houlennno ur striv bras diganto, arabat eo dezho en em douellañ - ez anzavan ez eo gwell

eeunaat ar yezh ar muiañ ar gwellañ ; ur fazi e vefe krediñ avat ez eo aes bepred eeunaat : ma reer re emeur war var da baouraat pe zoken da zistresañ ar mennoz a garfed eztaoliñ. Ar yezh a zeu da vezañ diresis ha ne c'hello mui a-benn ar fin talvezout da venveg meizañ ar stourmerion vrezhon ; koulz e vefe dezho d'ar mare-se kemer ar galleg diouzhtu. A-hend-all, ar re a glemm dre maz eo re ziaes ar yezh a zo ivez ar re na fell ket dezho ober ur striv re vras evit peurzeskiñ anezhi. mouezh an diegi eo o c'hlemm alies. Na disoñjent ket ez eus bet savet ur Skol eil derez evit o harpañ da studiañ o yezh.

II.

AR GLEIZELOURIEZH

Abarzh merat kudenn an darempredoù gant ar gleizelourion e fell din merkañ penaos e sav, da gentañ holl, hini reizhwiriegzh nep politikerezh a-berzh E.B.V. Ar wirionez a ranker lavarout : E.B.V. n'eo ket frammet ; n'eus na dael, na stroll-ren ebet ; ne ouzer ket piv zo ezel ; n'eus dezvad ebet d'an ezel ; dre se n'eus tu ebet da zegemer unan da ezel ent furmel. Un heuliad da gement-se eo n'en deus E.B.V. politikerezh resis ebet kennebeut. Moarvat e c'hell un drev pe ur gendrev kemer un intrudu bennak war an dachenn lec'hel hogen an intrudu-se ne enouestl tamm ebet an aozadur e unan. Ne glaskan ket tamall na burutellañ zoken ; kavout a ra din ez eo kement-se didec'hus evit ar mare ; hag ouzhpenn-se n'eo ket darev a-walc'h ar stourmerion yaouank a zo nevez deuet da E.B.V. evit divizout war ar prim ur politikerezh bennak ; ret eo dezho dastum skiant-prenet war dachenn ar politikerezh, studiañ, en em stummañ h.a. Evel-se e teskont o micher. Pezh a rankont gouzout hepken eo e tleont chom a-gevret, labourat ha prederiañ (1) a-gevret. A-benn daou pe dri bloaz e vo azv a-walc'h an darn-vuiañ anezho evit aozañ diazezoù an Emsav. Nep politikerezh a vez heuliet hiziv gant trev pe drev eta ne c'hell bezañ nemet ur politikerezh da-c'hortoz.

(1) An emvodoù trev, d'hor soñj, n'int ket bastus. An arvar diwarno eo krouiñ gronnadoù rannel. Emvodoù kendrev, da vihanañ, a ranko bezañ aozet er bloaz a zeu evit diorenn ur spered stroll en E.B.V.

E ser intrudu kendrev Roazhon eta e klaskin bremañ ensellout adarre degouezh ar c'henlabour gant ar gleizelourion. Evit reizhabegañ ar politikerezh-se, a gav din, e lavar hor mignon I.G. ez eo kreñvoc'h ar gleizelourion e deroù ar bloaz-mañ, lakaomp, eget warlene e fin ar bloaz. Se a c'hell bezañ gwir. Hogen an dalc'h n'emañ ket aze, d'hor soñj. Ar gudenn eo gouzout hepken 1) hag-eñ e klot kelennadurezh ha paliou an Emsav gant re ar gleizelourion, pe da vihanañ betek peseurt poent e klotont, lakaet e klotfent un tamm bennak ; 2) peseurt mad a c'hell tennañ E.B.V. er mare-mañ diouzh ar c'henlabour-se.

An eil poent a zo bet meret un tamm gant F.F. en niverenn diwezhañ ; distreiñ a rin warnañ abarzh pell. Klasket e vo diouzhtu avat diskoulmañ ar c'hraf kentañ : peseurt darempred a zo etre kelennadurezh an Emsav hag hini ar gleizelourion a zo marksourion anezho, dre vras, da nebeutañ.

Ret mat eo anzav ez eus, er par damkanel da vihanañ, un dislavar etre savboent ar varksourion hag hini ar "vroadelourion" evel maz eo kalz eus an emsaverion c'hoazh. Evit ar re gentañ ez eo renet ar bed gant nerzhoù armerzhel nemetken, da lavarout eo danvezel (seurt damkaniezh a zo enebet ouzh hini Hegel a wel en Istor un daelerezh etre nerzhoù speredel pe kentoc'h kealiadel) ; ar stourm-se, en hon amzer pergen, hervez ar varksourion, a wisk stumm ar stourm etre renkadoù, etre renkad an dic'hladeion hag hini ar vourc'hizion, perc'henn d'an araezoù kenderc'hañ ha korvoerion an dic'hladeion ; ar stourm-se n'eo ket ur stourm etre broadoù pe stadoù e nep keñver (evit ar varksourion ez eo ar vroad, ar stad vroadel ur grouidigezh eus ar bourc'hiziehoù broadel end-eeun) ; ~~daoust~~ d'o eneberezhioù diavaez avat e chom ar vourc'hizion kevarzhet kenetrezo eus penn ar bed d'egile. Evit herzel ha talañ outo eta, evit dont a-benn anezho e rank an dic'hladeion ivez bezañ kevarzhet kenetrezo penn-da-benn d'an douar. Heñvel : evel maz eo hollvedel impalaerelouriezh ar vourc'hizion

e tle ar stourm renet gant an dic'hladeion bezañ urzhiet e par an hollved ivez. Ar stourm broadel, d'ar c'houlz-se, ne c'hell ket bezañ ur pal hogen, er gwellañ degouezh, un amkan a zo, lakaomp, gwashaat ha diskar ar stad-mañ-stad impalaerel, un amkan ma ranker atav mont dreist dezhañ evit tizhout ar pal a zo diazezañ ur gevredigezh direnkad ha di-stad, di-vroad eta, penn-da-benn d'an douar. Disoc'h diwezhañ uhelvennad ar varksouriezh a zo eta krouiñ ur gevredigezh hollvedel unvan e-lec'h e vo bet dilamet an holl eneberezhioù renkadel ha broadel.

Ar pezh a laz amañ n'eo ket gouzout hag heuliet eo bet ar patrom-se bepred gant ar stourmerion gomunour. Bez e c'hellfed aes, er c'hontrol, diskouez penaos e klot ez pleustrek ar gomunouriezh, lakaomp, gant ar vroadelouriezh pe zoken an impalaerelouriezh taerañ - hogen se a lakafe da ^{zoken} evel evidomp kudenn an emzalc'h a zo da gaout, evel marksourion, e-keñver ar gomunourion-vroadelourion, P.C.F. h.a. - hogen o chom bepred e par an damkaniezh termeniñ hepken hag-eñ e tle hor stourm broadel-ni bezañ sellet evel ur pal pe un amkan ; da lavarout eo, dibab ^{a rankomp} etre an hollvedelouriezh komunour - harpet a-benn ar fin gant an impalaeriezhoù komunour rak int hepken a zo gouest da gas war-raok ur stourm e par an hollved - hag ar vroadelouriezh a sell ouzh savidigezh ur Stad vrezhon evel ur finvezh a-walc'h dezhi hec'h unan. Keit ha n'hor bo ket roet ur respont d'an dazeilad-mañ n'en devo hor c'henlabour gant ar varksourion ha pergen ar gleizelourion diazez damkanel ebet ; se zo lavarout e ranko paouez deziz pe zeiz.

Dont a ran bremañ da gudenn "pleustregezh" ar c'henlabour gant ar gleizelourion. F.F. en deus diskouezet peseurt mad a c'helled tennañ, er Skol-veur, eus an darempredoù gant ar gleizelourion. Pezh a lavar a zo gwir, a gredan. Un evezhiadenn a rin, koulskoude, pe, kentoc'h, ur goulenn. Daoust hag un obererezh politikel a c'hell bezañ "pleustrek" hepken ? Anat eo ne c'hell ket. Ma sikouromp ar gleizelourion hep kemer harp war un diazez

damkanel bennak - evit bezañ gwelet mat ganto ha bezañ lezet da labourat evit ar "brezhoneg" pe zoken an "Emsav", pe o spiañ e c'hellimp tuta un nebeut skolidi evit S.A.E. pe zoken evit E.B.V. - hep gouzout hon unan petra eo pal an Emsav end-eeun e chomimp er par santimantel ha n'eo ket er par politikel. Darn, en E.B.V., a soñj dezho moarvat e reer politikerezh gant santimantoù mat ; gwell eo dezho bezañ difaziet diouzhtu. Ma kenlabouront gant ar gleizelourion/^{/hep damkaniezh na kelennadurezh ebet} e tegemerint hep dale ha penn-da-benn damkaniezh ar gleizelourion ha didec'hout a raint an eil war-lerc'h egile d'ar strolloù kleizelour e-lec'h e savint, er gwellañ degouezh, gronnadoù rannel.

Evit parrat ouzh an dañjer-se e fell da zarn frammañ startoc'h E.B.V. Anat eo koulskoude ne servijo da netra frammañ ma ne resizer ket en a-raok savlec'h E.B.V. e-keñver marksouriezh ha kleizelouriezh. Zoken ma ne vez ket embannet fraezh bepred ar gelennadurezh dirak ar foran e tle, da vihanañ, bezañ anavezet gant ar stourmerion ha na ouezint ket a-hend-all pelec'h en em gavint hag a vo, a-se, dic'houest d'en em gannañ.

Hogen distroomp da graf ar"bleustregezh" a venegen bremaik. Kompren a ran eta penaos en ur metou a zo intret gant ar gleizelouriezh ez eo ret diwall na ve peget ouzhoc'h ur skritell a viro ouzhoc'h a labourat er metou-se end-eeun. Krediñ a ran ivez ez eus tu da levezonañ betek ur poent zo kelc'hiadurioù zo eus ar gostezenn gleiz e Breizh, dreist-holl marteze ar P.S.U. pe ar c'hweluniadoù ha kevarzheoù awenet gantañ. Hogen arabat eo en em douellañ : ne c'hellimp kaout levezon da vat nemet ma ouzomp hon unan termeniñ un damkaniezh sklaer ha diazezañ warni ur politikerezh efedus.

Diouzh un tu all ne rankomp ket bezañ trellet gant touellc'hoanagoù ar gleizelourion. An ~~dra-se~~ hon eus displeget meur a wech a-hend-all. O brizh-dispac'helouriezh avanturus ha romantel ne c'hell diboufañ e neb lec'h er c'hendegouezh politik-el a zo o ren bremañ. Un dañjer bras a vefe o veskañ E.B.V. en ur politikerezh ha na vije ket bet divizet ganeomp hag a c'hellfe reuziañ E.B.V. hep ma vije zoken anv eus Breizh.

Evit echuiñ : ar c'henlabour gant ar gleizelourion a laka e kont kelennadurezh E.B.V. O vezañ ma n'eo ket houmañ termenet c'hoazh (ne vern penaos ne c'hell ket bezañ divizet war ar prim), o vezañ ma n'eo ket frammet E.B.V. zoken, ne c'heller ket stagañ anv E.B.V. ouzh oberiadennoù politikel lec'hel ha berrbad. Moarvat e c'heller aotren izili zo da genlabourat dindan o atebegzh o unan en oberiadennoù-se - e-pad ur pennad amzer da vihanañ - hogen keit ha ne vo ket bet diskleriet fraezh politikerezh E.B.V. ne c'hell ket an oberiadennoù-se enouestlañ an aozadur e unan. An dra-se, d'hor soñj, a zle bezañ sklaer e spered an holl.

III.

SKOL AN EMSAV

Dija e niverenn miz c'hwevrer 1971 em boa respontet evit darn d'ar burutelladennoù a zo bet graet e ser ar pennad diwar-benn S.A.E.

Gwir eo e c'hellje ar pennad bezañ bet sinet. Arabat eo ankounac'haat evelato n'eo ket Imbourc'h ur gelaouenn gefridiel e nep doare ha ne enouestl nag E.B.V. na S.A.E., eveljust, evel maz eo merket war bajenn dalbenn ar gelaouenn. Dre se, ar pennadoù disin, - ha zoken ar re sinet, dirak al lezenn pergen - a chom hepken e kiriegezh ar rener.

A-hend-allez eo gwir ivez ne ra ar pennad nemet kinnig un diabellweled da obererezh S.A.E. Darn o deus komzet eus faltazi e ser ar skrid-mañ. Sur-mat ez eus faltazi ennañ, evurusamant. Rak peseurt dispac'h - hag adsevel ar brezhoneg e renk ur yezh vroadel wirion a c'houlenn un dispac'h - a oufe bezañ sevenet hep faltazi ? Hep klask termeniñ e baliou war hir dermen koulz hag e amkanioù war verr dermen ? Ar pezh en deus manket d'an trede Emsav betek henn eo dres an diabellweled-se : ar stourmerion o deus labourer ennañ o deus renet o amzer o kleuziañ ribouloù evel gozhed, pep hini en e doull, hep esa gwelout da belec'h e tisoc'hifent, hep darempred ebet

gant ar re all, a adlavaromp, oc'h en em ouestlañ d'ar memes oberenn dizremmwel a gasont da benn evel emgefreenoù.

Bremañ e klaskin d'am zro burutellañ kealiadoù zo eus hor c'henskriver.

1. Kraf al leuriadusted.

Sur eo ne c'hellan ket va unan komz en anv S.A.E. Se zo sklaer ha nepred n'em eus mennet kement-se. Pezh am eus klasket eo dreist-holl broudañ preder ar stourmerion hag o lakaat da soñjal ervat diwar-benn al labour a zo da gas da benn e Breizh evit adober eus hor pobl ur bobl vrezhon (pezh a empleg, da gentañ, adsavidigezh ar yezh evel yezh vroadel ar bobl vrezhon-se).

Padal e vefe arabat krediñ e c'heller diazezañ S.A.E. war reolenn an "demokratelezh" evit keloù-se. S.A.E. n'eo ket ur Strollad politikel. S.A.E. a zo un danvez gwazerezh broadel ; e bal a zo daskoriñ da bobl Vreizh he spered broadel war un dro gant anaoudegezh he yezh hag hec'h istor broadel. Dre se, pezh a vern enni da gentañ - ouzhpenn emskiant vroadel diorreet ha kreñv ar gelennerion - ez eo barregezh hag aketusted ar gargidi anezhi. Div gudenn a sav eta paz eus anv a envel ur stroll-ren a vo karget da verat aferioù S.A.E. ha da raktresañ hec'h obererezh : 1) pet, e S.A.E., a zo barrek a-walc'h war ar yezh evit bezañ sellet evel amaezhiad leun-wir ? 2) daoust ha niverus a-walc'h eo an amaezhidi-se evit gellout adal bremañ komz en anv S.A.E. ?

Evit ar mare, n'eus forzh penaos, ne c'heller ket profañ d'un neveziad, a-boan desket ar yezh eeun gantañ, a gelenn e S.A.E. abaoe un nebeut mizioù hepken, ar gwir da gemer divizadurioù a denn da obererezh S.A.E. A-raok bezañ degemeret da gelenner leun-wir e rank unan diskouez e oar ar brezhoneg evel ur yezh a sevenadurezh, da lavarout eo, ez eo gouest da dennañ eus e yezh an implij a denn eus ar galleg, lakaomp, pe n'eus forzh peseurt yezh a sevenadurezh. Gouest e tle bezañ da skrivañ ur yezh diorreet, reizh ha difazi.

Ne vo ket ret moarvat, er penn-kentañ marteze, bezañ tremenet dre ret un arnodenn ; en deroù e vo tutaet an danvez kelennerion dre emgendibab a-berzh ur stroll-ren ; hogen ne vern penaos e ranko barregezh ar re-se bezañ barnet e stumm pe stumm abrh ma c'hellint bezañ degemeret da gelennerion leun-wir hag en em vataat eus o dezvad a amaezhiad eus S.A.E. Ma ne vuker an amkan-mañ ne zeuor ket a-benn da ober eus an aozadur-mañ un afer sirius. Hag hi diziouerus n'eo ket a-walc'h ar gamaladiezh evit krouiñ un Emsav ; hemañ, hep mar ebet, a zo estreget ur vandennad bambocherion o kemer pochadoù a-gevret en ur huñvreal en deiz ma vo adsavet Breizh dre vurzhud.

2. Merk-barn an aketusted

An aketusted hag ar gendalc'husted hepken a ro tu da brizout siriusted ur stourmer ha pergen ur c'helenner eus S.A.E. Dre se ne vo gouezet ha gouest eo unan da seveniñ ur garg bennak e S.A.E. nemet d-bann daou vloaz bennak, evit an darn-vuiañ. Distabil hag hedro eo ar re yaouank ha ne c'heller kontañ warno nemet ur wech m'o devez diskouezet ez int gouest da genderc'hel gant ar memes striv e-pad ur pennad mat a amzer. A-hend-all, meur a vloaz e rank unan labourat kent perc'hennañ e yezh. Al lezober hag an diegi n'o deus lec'h ebet en Emsav. Dre se adarre e rank an danvez kelennerion diskouez o aketusted abarzh bezañ enwiriet da sammañ da vat un amaezh bennak en aozadur.

3.- Ster an digreizennerzh

Stadañ a c'heller ez eo digreizennet S.A.E. evit ar poent ha gwiriañ zokenez eo bet talvoudus betek henn an digreizennerzh -se e meur a geñver ; met gouzout a ranker evelato ez eo dañjerus ivez an digreizennerzh-se hag emañ S.A.E. war var da chom difrouezh, d'en em vruzhunañ ha da vont da get (pe da beurbadout e stumm un oberennig evel nouspet oberennig all e Breizh) ma ne reer ket ur striv a-zevri a-benn frammañ hag unvaniñ anezhi.

Ar c'hreizennerzh a zo diziouerus eta ma rank S.A.E. padout hag efediñ. Evel ma oa merket er pennad a-hend-all e rank ar c'hreizennerzh-se bezañ kempouezet gant emrended an trevioù a bled gant ar skolioù er par lec'hel. Da heul pennad F.F. ivez e oa bet resizet e tlee an trevioù bezañ meizet evel unvezhioù douaroniezhel-kevredigezhel, distag diouzh nep strollad politikel. E seurt doare ez eo diogelet ivez emrended SKOL AN EMSAV hag ar gwazerezh-kelenn e Breizh end-eeun.

4.- Koulzusted hevelep raktres

War va menoz n'eus ket tu da gomz diwar-benn S.A.E. nag E.B.V. egiz m'emañ evit un abeg mat : n'eus ket anezho c'hoazh evel aozadurioù gwirion. Moarvat e chom ar steuñv kinniget e rez ar faltazi, mar karer ; hogen keit ha ma vano S.A.E. e par ur cheñnerezh well-wazh eus ar yezh - egiz maz eo bet pleustret betek henn e Breizh - , keit ha ma chomo S.A.E. ivez un dastumad kelennerion diframm o c'houzout well-wazh ar brezhoneg - "Au royaume des aveugles les borgnes sont rois!" - ne gav ket din ez eus kalz tra da lavarout diwar o fenn. Ha ma fellfe dezhi chom er par-se ne gredan ket kennebeut e talvezfe ar boan en em skuizhañ kalz ganti. Se zo lavarout ne c'heller empennañ S.A.E. evel aozadur nemet en amzer-da-zont. Mennad ar pennad a zo bet embannet ne oa adarre nemet sturiant S.A.E war-du ar paliou a roy hepken ur ster d'hec'h obererezh.

5.- Yezh ar bobl ha yezh an Emsav

Chom a ra an destenn gozh, hini "yezh ar bobl" ha "yezh an Emsav", ar "brezhoneg bev", evel ma lavare stourmerion gozh evel Loeiz Herrieu etre an daou vrezel, hini ar maezioù, hag ar "brezhoneg chimik", ha kudenn an enbadur kenetrezo. Er preder-se eus "yezh ar bobl" e kavan-me un hekle eus morc'hedoù ar stourmerion bodet darzh GALV, da skouer hag eus ar werinelouriezh a zo diouzh ar c'hiz gant al ledemsav a zo diwanet diouzh luskad ar Falz, e-touez luskadoù arall.

Na soñjet nikun, da gentañ, ez eus ac'hanon un dismegañser eus "yezh ar bobl", eveljust. Ur breizhizelad on ; va zud kozh n'

o deus gouezet biskoazh ger gallek ebet ; va zud n'ouient kennebeut tamm ger gallek ebet abarzh mont d'ar skol. Daoust ma n'on ket brezhoneger a vihanik em eus klevet bepred ar yezh er gêr o vezañ ma veve unan eus va zadoù kozh brezhoneger unyezh du-mañ. Atav eta em eus bourret o klevout teodyezh va c'horn-bro a zo chomet tost d'am c'halon.

Daoust da se e kredan ez eo arabat da unan bezañ touellet penn-da-benn gant e drivliadelezh evel ma c'hoarvez alies gant stourmerion luskadoù al ledemsav. Dav eo eta en-sellout kudenn"yezh ar bobl" gant ur spered ken yen ha maz eus tu.

Da gentañ, daoust hag ez eus ur yezh eus ar bobl ? D'ar goulenn-se e ranker respont "nann". Bez ez eus teodyezhoù a zo tost pe dostoc'h ouzh ar yezh lennegel - hini an Emsav - hogen a zo disheñvel bras diouzh an eil diouzh eben alies (ky. gouyezh Wened hag hini Gastell-Pol) ha na vezont implijet nemet evel yezh ur vicher bennak, labour-douar pe beskerezh, lakaomp, pe er gêr evit ober war-dro an ti : er-maez eus an degouezhioù-se ez implijo ar yezherion ar galleg pe un trefodaj spontus (an tri-c'hard eus ar gerioù a zo gallek).

An teodyezhoù-se a zo aet da get alies pe a zo war-nes mont da get. Er gwellañ degouezh, a-benn 20 pe 30 vloaz ne chomo mui - evel en Iwerzhon - nemet aspadennoù anezho e korn pe gorn eus kornog ar vro. Em rannbarzh-me, e Gwaien ne gomzer mui brezhoneg ouzh ar vugale abaoe 35 bloaz ; er C'hab Sizhun ez eur paouezet a gomz ar yezh ouzh ar vugale adarre abaoe 15 vloaz bennak, en darn-vuiañ eus an tiegezhioù. Ha n'eo ket S.A.E. na zoken ar Stad vrezhon a c'hello en drou herzel kalz ouzh ar walenn-se. Gwell eo, a gav deomp, gwelout an traoù evel m'emaint.

Moarvat, en difetis, ez eo talvoudus ar rannyezhoù evit tapout ur pouezmouezh mat pe zeskiñ troioù-lavar. Ent pleustrek avat e ranker meizañ e tesk an nevezvrezhonegerion ar yezh dreist-holl - pe hepken zoken - e kelc'hiadurioù an Emsav. Da hetañ e vefe weljust o dije tro hag amzer da chom war ar maez

e kornog ar vro evit an abegoù a venegemp bremaik ; hogen arabat eo en em chalañ re : ar pezh a zo a-bouez eo e teufent a-benn da gomz ar yezh unvan, ne vern pelec'h o devo he desket rak ar yezh a zleint implijout a vo ur yezh kêr, azas ouzh ar sevenadur kêrel ha n'eo ket ur yezh henvoazel o tennañ d'ar vuhez war ar maez.

Lakaomp eta he deus "yezh ar bobl"- hini ar gouerion a ra bepred ganti e kornog ar vro - un d'lvoudegezh yezhoniel pe drivliadel bennak ; un dra a chom gwir daoust da bep tra : ne c'hellomp ober kalz tra evit ar poent a-benn mirout outi a vont da get. Ouzhpenn-se, sonioù ha gerioù n'int nemet sonioù ha gerioù : ma n'int ket stag ouzh ur sevenadur bev krouet bemdez gant ar bobl - hogen petra a c'hell kouerion Vreizh-Izel krouiñ gant ar stlabez yezh a zo bet lezet dezho war wall an d'skadurezh c'hall , - ez eo tonket dezho mont da get. N'eo nemet o tegemer yezh an Emsav hag o tont^{d'an} Emsav e c'hellou kouerion Vreizh krouiñ ur sevenadur. N'eus forzh penaos, goude ma oufent c'hoazh un tamm brezhoneg, ez eo kouerion Vreizh-Izel divyezherion : dre ar skingomz, ar skinwel, ar c'helaouennoù gall ez int intret penn-da-benn er sevenadur gall bourc'hiz aozet e Paris. Evit hejañ kuit yev ar sevenadur-se e tleint ober evel an Emsaverion : dilezel ar galleg ha kemer d'o yezh a sevenadur nemeti ar brezhoneg.

Yezh ar bobl n'he deus nemet un d'lvoudegezh d'hor soñj : pourchas un diazez d'ar re a fell dezho deskiñ ar yezh vroadel, hini an Emsav.

Evit krennañ e c'hellimp merkañ kement-mañ :

- 1) ne c'hell ket yezh ar bobl - "an teodyezhoù" - bezañ difennet evito o unan rak n'int stag ouzh sevenadur ebet ken ;
- 2) ne c'heller ket degemer savboent gwerinelour trivliadel luskadoù a seurt gant GALV en abeg d'an d'voud emacomp o paouez menegiñ : n'eus mui stuzegezh werinel ebet e kornog ar vro (koulz hag er reter) a vije eztaolet dre an teodyezhoù brezhonek
- 3) kudenn "yezh ar bobl" a zo ur fals kudenn (pe romanek) rak diwar vremañ ez eo ar galleg "yezh ar bobl" eus 3/4 pe 4/5 eus Breizhiz.

K E V R E D O N I E Z H U N D I S P A C ' H
pe : P E M P V E T B L O A V E Z H A N
D I S P A C ' H A L J E R I A T, 1959, hervez
levr Frantz Fanon
g a n t Y E U N G O U R V E Z

P'omp bet gweladennet gant kelaouennerion "Ouest-France" da geñver Devezhioù-studi E.B.V. e Lanuon, goude Pas en deus hor mignon F.K. keñmeriet mouchenn merc'hed Algeria ouzh ar brezhoneg evel benveg da lakaat hor pobl da gemer endro skiant eus he broadelezh. Awenet e oa ar geñveriadenn-mañ gant levr F. Fanon a zo meneget en tálbenn. Klask a ra imp er pennad-mañ da heul teurel ur sèll war ul levr en deus bet ul levezon vras war ar stourm dieubiñ en Aljeriat en degved tremenet.

=====

O lenn al levr-mañ ez eur dedennet diouzhtu rak pleustrek kenañ ez eo. Er pennad a denn da gudenn ar stourm kevredoniel e kaver an arroudenn a gomz eus mouchenn merc'hed Algeria. Div anadenn a zo deskrivet en arroudenn-mañ. Da gentañ, emzalc'h ur gevredigezh a vir he stuzegezh kozh, heñvel a-walc'h ouzh hini ar gevredigezh vrezhon a-raok ar brezel o virout ar brezhoneg evel yezh tiegezh, yezh veuriadel koulz lavaret, evit herzel ouzh an digempouez degaset gant stok ar stuzegezh arnevez gall en em lede e Breizh gant harp ar galloud gall. An eil anadenn a zo stourm pobl Algeria a-enep d'ar stuzegezh estren a reas da verc'hed Algeria mirout o mouchenn, da skouer. Daoust ha ne vefe en arbenn ma heuliomp an hevelep hentenn ez omp bet degaset e Breizh da gelenn ar brezhoneg. Ar gudenn-se eo a fellfe deomp ensellout hiziv.

Ul liamm a vez atav etre an degouezhennoù a bep seurt a c'hell c'hoarvezout en ur vro : hennezh a zo youl an trevadenn da zistrujañ hengounioù broadel ar bobl ha d'he lakaat da gemer ur stuz estren ; evit se e klask an dalc'her kas d'an traon frammoù kent ar gevredigezh trevadennet pe enebañ ouzh ar frammoù broadel nevez a zo^o sevel. Setu, a-hend-all, un darn eus levr Fanon diwar-benn ar gudenn-se.

"An doareoù d'en em wiskañ a zo unan eus merkoù-diforc'hañ pennañ ur gevredigezh. Moarvat e diabarzh ar gevredigezh-se e kaver doareoù lec'hel ; kemm a zo etre "giz" ar c'horn-bro-mañ-korn-bro hag unan all. Padal e chom ar gwiskamant unvan a-walc'h en ur gevredigezh ; ha bez e c'heller alies diforc'hañ ar stuzegezhioù dre en em harpañ war an doareoù d'en em wiskañ nemetken.

Er bed arabat - se zo anavezet - e vez paket dremm ar merc'hed ebarzh o mouchenn. Bez e c'heller chom pell amzer hep gouzout n'en deus ket ur muzulmad ar gwir da zebriñ kig-moc'h hervez lezenn ar C'horan ; met evit pezh a sell ouzh mouchenn ar vaouez, a-walc'h eo pourmen e stredoù ur gêr arabat ha merzout ar merc'hed gant ur vouchennwar o dremm evit gouzout emeur en ur vro arabat end-eeun, en ur gevredigezh vuzulmat. Evit an tourist eta ez eo ar vouchenn un arouezenn vat eus ar sevenadur arabat hag aljeriat pergen. Gant ar wazed aljeriat n'eo ket ken fraezh an traoù e gwirionez ; an "djellaba" n'eo ket ken unvan a rannvro da rannvro pe a gêr da gêr zoken en Aljeria. Gant ar merc'hed avat n'eo ket heñvel ar gont : ur vaouez paket he dremm en he mouchenn wenn a zo, dre se dres, arouezenn ar gevredigezh aljeriat e forzh petore lec'h e ve. Moarvat, pa gejer ouzh ur plac'hig aljeriat, ne dalvez netra he gwiskamantoù met splann eo bepred talvoudgezh an "haïk" a guzh dremm ur vaouez aljeriat. Gwelout a raïmp bremañ e teuio ar pezh gwiskamant-se da vezañ danvez ur stourm etre an emsaverion hag ar framm gall diazezet en Aljeria. Hemañ a ray e seizh gwellañ evit kas da get ar c'hiz a zougen ur vouchenn e-touez merc'hed Aljeria hogen ar bobl aljeriat a enebo gant un nerzh a hañvalo bezañ hini an dilusk

d'ar C'hallaoued. An emgann-se a-enep d'ar vouchenn a grogas a-raok 1954 ha renet e voe gant kargidi d'hall o devoa da gefridi divroadelañ ar bobl aljeriat ha terrñ e frammoù hengounel. Ar re-mañ eta a zivizas tagañ ar vouchenn a oa arouez ar gevredigezh muzulmat-aljeriat.

Ar ratozh-se ne oa ket diboell. Studiet eo bet a dost argudenn gant arbennigourion ha skiantourion a bep seurt ha pergen gant kevredoniourion. Ar re-mañ o devoa merzet e oa diazezet ar gevredigezh aljeriat war ar merc'hed (en eneb d'ar pezha vez kredet ne c'hoari ar gwaz aljeriat nemet ur roll dister e stummadur ar vugale pe en aozadur an ti. Adalek m'o devoe ar C'hallaoued, dre o studiadennoù war an dachenn, merzet kement-se, o deus divizet klask gounit ar merc'hed d'ar stourm gall gant ar soñj da c'hellout levezonañ evel-se ar peurrest eus ar gevredigezh aljeriat. Evit se e tleent tennañ anezho diouzh bed danguzh ar gevredigezh hengounel hag o lakaat da zegemer gizioù ar gevredigezh trevadennel. Termenet e voe neuze an hent politikel da heuliañ : Mar fell deomp skeiñ d'an traon ar gevredigezh aljeriat e rankomp deñ dennañ ar merc'hed ; dav deo deomp eta mont d'o c'herc'hat a-dreñv d'o vouchenn hag a-dreñv da vogerioù ar tiez m'emaint kuzhet enno gant o gwazed."

An dodennoù a vruderezh politikel a voe pleustret diwar neuze a oa re-mañ : ret e oa difenn ar vaouez aljeriat izelaet, sparlet a-dreñv dor he zi, kraouiet, lakaet a-gostez. Deskrivañ a med barregezhioù bras da sabatuiñ ar merc'hed aljeriat, barregezhioù hag a oa bet mouget gant ar stuzegezh broadel aljeriat ; war a lavare eta ar vruderion c'hall en devoa ar gwaz aljeriat graet eus ar vaouez aljeriat un dra digiñv, abaf, diuntrudu ; taget e veze emzalc'h ar gwaz aljeriat ha diskouezet e veze an emzalc'h-se evel un emzalc'h krennamzerel ; taolennet e oa ivez evel ul loen gouez, kentidik, sadek h.a. o pouezañ dreist-holl war e emzoug ouzh ar merc'hed. E berr gomzoù, degas a rae ar framm gall e zoareoù-barn hag e vuhezgezh

ha klask a rae o stenn dre ar vro evel un doare gwiad-kevnid ma veze paket ennañ Aljeriz ; ar gwiad-kevnid-se a zo ar meizframm gall a ro da Aljeriz mezh anezho o unan evel Aljeriz hag o laka da hiraezhiñ da zont da vezañ Gallaoued-o-lodenn-glok, o laka ivez d'en em santout kablus diouzh ma fellfe dezho chom Aljeriz.

Adalek ar mare-se e saver en Aljeria nouspet strollad mennet da sikour ar paour kaezh merc'hed aljeriat : "Harp ha kenskoazell d'ar merc'hed aljeriat" h.a. mennet d'ober mezh d'ar gwaz aljeriat e framm ar gevredigezh hengounel ; aloubet e vez ar c'harterioù arabat er c'hêrioù gant kenskoazellerezed ar prefedtioù.

Ar re baourañ a vez tizhet da gentañ, ar re o deus naon : war un dro gant pep kilo riz e rank an ezhommez lonkañ meur abrezegenn diwar-benn dismegañs ar merc'hed a chom sebeliet dindan o mouchenn ha sparlet a-dreñv dor o zi ; alioù a vez roet d'ar merc'hed : o broudiñ a reer d'en em zizober diouzh galloud trevadennet o gwazed ; atizet e vezont da derriñ an henvoazioù mozus-se h.a. Hag ar framm gall da bostañ kevalaoù bras spontus en stourmadenn vrudañ-se o soñjal e teuy ar gwaz aljeriat da zegemer buhezegzh an trevadennet war-lerc'h e wreg ha ne vo mui gouest dre se da herzel outañ. Er raktres gall e oa tonket d'ar merc'hed gounit o gwazed d'ar stuzegzh c'hall ha da zistrujañ evel-se framm ar gevredigezh hengounel. Hizivc'hoazh e 1959 n'o deus ket ar C'hallaoued dilazet penna-benn an huñvre gozh-se ha prest int da grediñ e vo saveteet Aljeria c'hall gant ar merc'hed aljeriat bet gallekact...

.....

En eneb, ar c'hefredour gall a zesav e diegezh hervez an henvoaz a laka droug e-leizh e korf ar gargidi c'hall. Mar pardoner d'ar "fellah" dizesk e zallentez, ne bardoner ket d'ur breutaer pe d'ur mezeg diskouez hevelep a-heurterezh ; tamallet garv e vezont eta ma ne zibabont ket ar vuhezegzh c'hall, ma toug ar vaouez ur vouchenn, ma chom er gêr h.a. Pa c'hoarvez kement-se e vez nec'het ar framm gall.

Lavarout a reer, à skouer, : "Daoust dezhañ bezañ ur mezeg, lakaomp, e chom un arab, ha netra ken." E gwirionez, pezh a damaller d'ar c'hefredour eo chom hep c'hoari e roll bourc'hiz gall, chom eta hep reiñ harp da skarzhañ frammoù ha stuzegezh ar gevredigezh hengounel; rebechet e vez outañ skoazellañ anezhi er c'hontrol ha marteze klask adsevel frammoù broadel aljeriat..."

Diwar lenn ar pennad-mañ e verzo unan o deus bet ar pennadurezhioù gall e Breizh un emzalc'h damheñvel ouzh an hini a zo deskrivet amañ a-raok an eil brezel ha dreist-holl a-raok ar brezel kentañ peogwir e klaske ar frammoù gall d'ar mare-se distrujañ ar yezh evel un elfenn eus stuzegezh henvoazel ar vro. D'ar mare-se avat n'o devoa ket kefredourion an Emsav un emzalc'h emsavel e gwirionez ; er c'hontrol, c'hoariet o deus - evit an darn vrasañ anezho - roll ar vourc'hizion c'hall oc'h harpañ diazezidigezh ar framm gall hag erouhidigezh e zivizadurioù e Breizh. Kalz a vefe da lavarout diwar-benn se. Kounomp avat ne gomze emsaver ebet brezhoneg ouzh e vugale neuze.

Bezef pe vezef, pezh a zo dudius e levr Fanon eo e tiskouez penaos ez eo aner d'ar galloud dalc'her ha trevadennet klask tennañ ur boblañs bennak diouzh he stuzegezh henvoazel. O tegemer ar stuzegezh europat boutin, lakaomp, e teu ivez da zegemer ivez pennvennozoù politikel ar gevredigezh europat dre vras, gwir ar broadelezhioù da sevel stadoù h.a. Setu, aner eo arnod ar galloud dalc'her da zivroadelañ ur vroad dalc'het, dreist-holl ar broadoù isdiorreet hag henvoazel. Ha Fanon a ziskouez penaos ar vaouez tennet he mouchenn diganti a zeuy tre en Emsav hag a gemero perzh er stourm dre an armoù zoken h.a. Dre zont a-stok ouzh ar bed arnevez e teu ar poblañsoù henvoazel da gemer skiant eus o broadelezh. E Breizh, da skouer, ez eo aet an Emsav war-raok kalz mui en XXvet kantved - pa oa stag ar gouarnamant gall da zivroadelañ ar bobl vreizhat - eget en XIXvet kantved pa oa brezhon rik, ha dizesk war un dro. Rak n'eo nemet en deiz maz eo bet distrujet e di e verz uan an ezhomm a sevel un ti nevez a-zevri.

ADDISPLEGOU E SER AR PENNAD "STOURM AR FRAMM GALL A-ENEP D'AR
STUZEGEZH HENGOUNEL EN ALJERIA"

Kemer a reomp tro diwar ar pennad aozet gant Y.G. evit stagañ un nebeut addisplegoù. Da gentañ a-keñver an diforc'h a zo etre degouezh Breizh hag hini Aljeria.

Ar stourmerion vrezhon a zo bet techet abaoe ouzhpenn dek vloaz zo da heñvelaat emgann Vreizh ouzh hini ar broioù isdiorreet ha pergen ouzh hini Aljeria. Displeget hon eus perak e oa touellus seurt keñveriadur ebarzh an niverenn 4 eus ar gelaouenn dindan an talbenn "Emdouellioù ar bloavezhioù c'hwegont". Moarvat, e meur a stumm e tenne Aljeria 1954 da Vreizh an naontekvet kantved ha deroù an ugentvet. Gwir eo ivez e oa diazezet an diforc'hoù stuzegezhel etre an div bobl war ziforc'hoù kravezel evit darn. Arabat eo ankouaat da skouer, ez eo giz ar vouchenn ur c'hiz a orin muzulmat hag he doa ar c'hiz-se ur ster relijiel buhezal (ne c'heller ket lavarout kemend-all diwar-benn giz ar c'hoefoù e Breizh, eveljust). Rak komz reer eus "stuzegezh henvoazel" en ur zisoñjal ez eo bet stummet houmañ gant ar relijion en holl vroioù (moarvat e c'hellfe ar varksourion reiñ ur ster armerzhel d'ar vouchenn met betek henn n'em eus lennet plaenadur marksel rik ebet eus ar vouchenn, daoust ma c'heller diskleriañ marv ar c'hoefoù diwar abegoù armerzhel rik : diouer a ampez hag ampezerzed, da skouer). Bezet pe vezet, n'eus mar ebet he deus ar relijion a viskoazh pourchaset darn eus pennañ merkoù-digemmanñ ar vroadelezh ; da skouer, kabilegerion hag arabegerion a oa unanet gant ar relijion vuzulmat, evel ma oa unanet romanegerion ha brezhonegerion e Breizh gant ar gatoligiezh en amzer kilstourm ar Chouanted a-enep d'ar Republikaned c'hall. A-hend-all, didalvez eo kounañ amañ roll ar relijion e diwanadur an emskiant vroadel e-touez Iwerzhoniz pe Israheliz : anavezet mat eo kement-se gant an holl. Netra souezhus eta maz eo bet difennet hag arveret ar relijion gant ar vroadelourion er stourmoù-dieubiñ. E Breizh zoken eo a-walc'h teurel ur sell war istor an Emsav e deroù ar c'hantved evit meizañ diouzhtu ar pouez a veze roet d'ar relijion "vroadel" e Breizh gant ar vroadelourion en amzer al lezennoù "laik" embanet gant ar mavdiern gall Combes e deroù ar c'hantved.

Anat eo ne c'hoari mui an elfenn relijiel-se roll ebet en Emsav hag e Breizh en eil hanterenn an ugentvet kantved o vezañ maz eo bet gounezet Breizhiz d'ar stuzegezh kêrel-digravezel a zo en em fennet en hor bro dre lies hent abaoe deroù ar c'hantved end-eeun. An heuliad eus kement-se eo n'eus mui diforc'h stuzegezhel-buhezegezhel ebet ebet koulz lavaret etre Breizhiz ha "Gallaoued". Evel maz eo peuz-varv ar yezh a-hend-all e c'heller en em c'houlenn ha n'eo ket aner un tammig stourm ar vroadelourion, o vezañ ma n'eus mui doare diforc'h ebet da saveteiñ ha da "virout" e Breizh, hag o vezañ ivez ma ne c'heller ket diskouez zoken ez eus ezhomm eus an emrenerezh evit diorren Breizh (seurt arguzennoù armerzhel n'o deus talvoudegezh nemet evit ar Vrezhoned a zo brogarourion en a-raok).

Ouzhpennomp ez eus un dañjer all o c'hourdrouz ar vroadelouriezh hag an Emsav e Breizh, un dañjer ha na vez ket merzet gant an Emsaverion o unan. Emañ ar varksiadegezh marteze war-nes distroadañ hag amsaviñ ar gristeniezh e Breizh. Eveljust e c'heller empennañ ur Vreizh varksiat o tiogeliñ he dibarelezh dre en em geferata ouzh ur Vro-C'hall kevalaour frankizet, evel ma ra Kuba e-skoaz d'ar Stadoù Unanet (pe neuze - ma teufe Bro-C'hall da vezañ ur vro varksat, -o tibab ur ranngredenn varksat disheñvel diouzh hini houmañ, egiz m'he deus graet Albania o tibab ar vaouriezh, lakaomp). Hogen o vezañ m'en em laka ar stourmerion-se er par etrevroadel - da lavarout eo, ent pleustrek, er par gall - ez eus arvar bras na vefe endalc'het ar stourm marksat broadel zoken - a-hervez atav - e framm ar stourm marksat gall, ha netra ken, seul aesoc'h ma vo bet ar stourmerion varksat vrezhon e skol gant Gallaoued ken na vo diforc'h speredegezhel ebet etrezo hag o mistri.

Ur gwall arall a zo da venegiñ : ne verzer ket mat penaos e c'hell ar varksiadegezh, dre vras, klotañ gant ar vroadelouriezh : houmañ a zalc'h kont eus ar peadra istorel dastumet gant ur vroad a-hed ar c'hantvedoù, hep teurel pled ouzh ar renkad en deus krouet ar peadra-se (implijet eo bet e ser ar peadra-se ar ger kevala istorek evit displegañ ez eo ar peadra-se ur benveg krouiñ, d'e dro, ha n'eo ket un hêrezh varv hogen ur meizad hegelat kentoc'h eget marksat eo hemañ). Ar varksiadegezh avat ne anavez nemet ur renkad proleterion skignet dre ar bed a-bezh hogen unanet - a bennaenn, da vihanañ - en un Emsav unvan ; diouzh un tu all e tegemer ar vroadelouriezh kevezerezh ar Stadoù (a-led an douar penn-da-benn) ha klask a ra diskoulmoù pleustrek hepken d'ar c'hevrierezh-se ; aotren a ra ivez da bep broad ar gwir - a sturienn bepred, da vihanañ - da vezañ mestrez he douar hag he finvidigezhioù, riek eta. Ar varksiadegezh, en eneb, a dennfe da ziazezañ ur gevredigezh hollvedel a vefe reolet e gwirionez gant un impalaeriezh bennak (ha n'eo ket gant ur bodad kevartzhel eus an holl vroadoù dre ar bed).

Dre m'o deus meizet mat an dislavaroù-se etre ar vroadelouriezh hag ar varksouriezh eo o deus ar vrogarourion aljeriat diwallet mat da reiñ chañs ebet d'ur strollad komunour da gemer ar galloud en o bro goude ar brezel dieubiñ : berzhet o deus ar strollad hag ar c'helaouennoù a felle d'ar varksourion sevel war-lerc'h an dieubidigezh. Kement-se n'en deus ket miret outo a sevel ur Stad gwir sokialour ha mat e rafe ar vrogarourion e Breizh o prederiañ war ar skouer-se, da vihanañ.

Kamp evit deskiñ iwerzhoneg (kendalc'h ar bajenn 87)

Goude pemzektez e e Trà Bolgan e c'hello ar berzhidi mont, mar karont, da dremen eisteiz (22-28 Eost) en Enez Cléire ("Cape Clear") ur gouzelva runellek er c'hreisteiz da vBaltimore, e mervent kontelezh Cork : pedet int da zont gant "Na Fanaithe", ur strollad iwerzhonegerion yaouank a ya di evit harpañ tud an enezenn da ober labourioù-arneveziñ. Evel-se e c'hellint pleustriñ ar pezh o devo desket e Trà Bolgam. Tu a vo d'ober gant o rikou-kenginañ evit aozañ boued, ha seier kousket a vo kavet eno ivez. Pedet e vior da gemer perzh el labour ivez, met ne vo ket ret. 40 lur e vo evit ar sizhunvezh. D'ar re a fell dezho dont da dTrà Bolgan lavarout hag e fell dezho mont da Enez Cléire ivez. Merkit e krogo ar skol-hañv e Trà Bolgan diouzhtu goude an Eisteddfod e Bangor.

GERIOU HA NA GAVER KET ER GERIADURIOU

Aketusted - assiduité - Arbennigour - spécialiste - amaezhiad - kargiad
Buhezal - moral
Kefridiel - officiel - kevredoniezh - sociologie - kevredoniel -
sociologique -
dezrannañ - analyser - dezvad - statut - damkaniezh - théorie -
damkanel - théorique - dic'hladeg - prolétaire - diazas - impropre
eztaoliñ - exprimer - enwiriañ - autoriser - emrended - autonomie -
emgendibab - cooption
gwerinelouriezh - populisme -
hollvedelouriezh - universalisme,
leuriadusted - représentativité
mouchenn - hañk, gouel, pezh lien a laka ar merc'hed muzulmat war o dremm
reizhwiriegezh - légitimité - reizhabegañ - justifier -
pleustrek - pratique - pleustregezh - caractère pratique.
trivliadelezh - sentimentalité - teodyezh - dialecte -

Anadenn - phénomène - Korvoiñ - exploiter - korvoadur - exploitation
Dodenn - thème - speredegezh - mentalité - stuzegezh - culture
(doare m'eo stummet spered ur bobl ; ster gouzañvant ha n'eo ket
oberiant). dazeilad - dilemme.- kefredour - intellectuel -

Klask ar gerioù all er roll a zo bet embannet war an niverenn 15.
